

**P'edon war bont an Naoned**

P'edon war bont an Naoned o gué, p'edon war bont an Naoned  
Ober va fourmenad lam tirelire lon laine,  
Ober va fourmenad lam tirelire lon la

Me 'welas ur plac'h yaouank,  
A-hed ar stêr o ouelañ

Ha me c'houlenn diganti  
Perak e ouele 'ta

Va gwalenn aour, emezi,  
Er mor a zo kouezhet

Petra 'rofec'h-c'hwi din-me,  
Me 'yelo d'he zapañ

Hanter-kant skoed, emezi,  
'Roin deoc'h a galon vat

Hanter-kant all emezi,  
Er gêr prest da gontañ

Martolod pa 'n eus klevet,  
E zilhad n'eus pilet

'Vit ar c'hentañ ploñjadenn,  
Netra n'eñ deus gwelet

'Vit an eilvet ploñjadenn,  
Ar walenn 'zo touchet

'Vit an trede ploñjadenn,  
Ar paotr a zo beuzet

E dad a oa er prenestr  
A ziroll da ouelañ

Tri mab am eus me ganet,  
O zri ez int beuzet

Er vered sakr an Dreinded,  
O zri e vint beziet